

Gwerz an O. Sant Jeg

Patron Eviaz

DISKAN.

*Kanomp, Eviazis, gwerz hon Patron,
Kanomp buc'n Otro sant Jeg,
Gant e skouer verro en hon c'halon,
Ar c'hoant d'arruout'n e veleg.*

1. En amzer goz, en hon Breiz-Izel,
Er c'houls m'hon devoa rouane,
Oa eur roue hanvet Judaël,
Tri mab d'ean, ar gwella oe.
2. Judikaël ha Jeg ha Vignek,
Breuder a oad, breudeur a fe,
Servijerien an Oll C'halloudek,
O c'halon digor war an è.
3. Da Judikaël, ar mab hena,
'Teuas an tron warlerc'h e dad :
N'en kemeras ket 'vit kertria ;
War Vreiz 'tremene gwell varrad.
4. Dagobert, neuze roue Frans,
'Dolas e dud 'tre hon garzo ;
Ha pell na vije ket, sur, 'michans,
O tremen kabestr mad d'hon bro.
5. En diou emgann vraz, Judikaël,
'Dornas a blad ar Fransijen.
Dre c'harv nebeut, dre zouster well,
Deus Breizis e teuer a benn.
6. Gant prez oe digaset sant Eler
Da c'houl peuc'h digant hon roue ;
Etre an daou zant, en berr amzer,
Ar peuc'h 'gavas gwir diaze.
7. Peuc'h hag urz vad lakaet er vro,
E fellas da Judikaël
Lezel gant Jeg tron hag enorio,
Ha 'nem denn en kouent Gaël.
8. Jeg a c'houllas eun nebeut deio,
Kent 'vit kemer eur garg ken braz ;
Goude mar 'zonzj ha kalz pedenno,
Da vroio pell 'kuz e tec'has.
9. E tec'has gant daouzeg perc'hirin,
Da vont en bolante Doue ;
Ma oent kaset gant an dorn divin,
Beteg Ponteou, ti kout an dre.

10. Ar c'homt-ma, oa Emon e hano,
O digemeras ar gwella,
Ha Jeg da c'houl eul lec'hik distro,
Peuc'h-mik a drouzio ar bed-ma.
11. Eno, gant hepken eur servijer,
Gwech-all unan e vevelien,
Hon sant eno a vevas dister,
'Kreiz pedenno ha pinijen.
12. Doue 'ziskoueas dre var 'vurzed,
Ar zantelez oa en Sant Jeg :
Oll dre ar vro ec'h eaz ar vrud,
Ma teue pobl tud 'n e veteg.
13. Pellât a ra, diou wech e pella,
Na c'houl pleustr nemet gant Doue,
Na fell d'ean gwelet, klevet tra,
Nemet en env hag an ine.
14. Koulskoude eun de ar c'homt Emon,
Oc'h ober kas war eun heiez,
Arruas klanv, divi a galon,
Gant ar zec'het stanket e vouez.
15. Goude pedi, 'vel ma oar ar Zent,
Sur 'c'h eo bet klevet gant Doue,
Jeg a sko e vas e kreiz an hent,
Ma saillas stivel a zoare.
16. D'ar Sent Perr ha Paol, devod meurbed,
Fellas d'ean gwelet ho be ;
Ur bloa en Rom en eus tremenet,
'Tre lec'hio santel ar ger-se.
17. Neuze ar Pab a oa sant Martin,
'Reas dean 'r c'henta digemer ;
Gant kalz all c'hraso, d'ar perc'herin,
'Roas relego un niver.
18. Ha Jeg da zistro gwell evuraz,
Leiz kalon ac'h anoudegez ;
'Ti un denjentil madelezes,
En oe da loja un nozvez.
19. Ar vere'h ac'hane a oa dallez,
Hon sant eviti a bedas,
Ha gant e relego d'ar baourez,
Ur gwelet mad trê a roas.
20. Un de ma lare an oferen,
Gan'an Emon ha tud e di,
Un dorn oe gwelet, kreiz ar wabren,
O viniga bara, kali.
21. E oe gwelet eur bagad ele
O tout en tro-zro d'an aoter,
Hag ur vouez a laras evelse :
Jeg, tostât a ra hoc'h amzer.
22. Arru eo ar c'houlz ma tilezfet
Ho korf paour hag e ankenio,
'Vit dont ganin-me d'ar joausted,
D'ar joausted 'zo en envo.

23. A viz kerzu an drizegvet de,
 'R bla c'houec'h kant tri ha hanter kant,
 A rentas e ine da Zoue,
 Peuc'h hag evruz evel ur sant.
24. E gorf a chomas 'vel fresk-beo
 En tro pad oll daou ugent vla,
 Ma turede kristenien ar vro
 Da bedi ha da 'nem westla.
25. Ar gouarnour, o klevet ar vrud,
 Arruas, hag hen divorc'hed,
 Amgredig diwarben ar burzud,
 E tigoras feulz an arched.
26. 'Zaleg ma welas ar c'horf santel,
 'Koueas d'an douar 'vel maro ;
 An otro Doue d'imp o tiskwel,
 Penaoz e zent a zifenno.
27. Ken liez a vurzud a reas,
 Ma oe lakaet hep dale,
 Gant an Iliz etouez ar sent braz,
 'Ro d'enori d'he bugale.
28. Kouent oe savet gant e hano,
 Enni menec'h Sant Beneat ;
 'N o chapel miret e relego,
 Gant tud santel enoret mad.
29. Ama oa kemeret 'vit patrom,
 Gan hon zud koz a bell-amzer ;
 'Vit o zant karanteuz ha tom,
 'Vit o zad bugale dener.
30. Koulz hag i ni fell d'imp-ni ive
 Chom bepred stag ouzoc'h, Sant Jeg,
 C'houi 'vidomp bedo 'n otro Doue,
 Ha ni vo bepred anoudeg.

Kanaouen d'an O. Sant Jeg

DISKAN

*Otro Sant Jeg, Patron Evias,
 'Vit hon sikour 'c'h eus galloud braz,
 Roet ho torn d'ho pugale,
 Ma c'h arruoint ganeoc'h un de.*

1. 'Vit kemment ve laket en priz,
 C'houi n'ec'h eus bet nemet dispriz ;
 Fae oc'h eus graet war enorio,
 Pinvidigez, plijadurio.

2. Souzet oc'h eus diouz kurunen,
Gant aoun ho poa da goll eben,
Kurunen ar bed 'c'h eus lezet,
'Vit hini an env gwell miret.
3. Petra eo kurunen ar bed ?
Ar bleu enni prestig goenvet,
Piko enni en peb amzer ;
Nemet nec'het ganti na ver !
4. Petra eo ar meulodio,
O divank ar galon peb tro :
Mil veulodi, grier 'bouez pen,
Hag er galon eve ienien.
5. Ar bed zo traitour e gomzo,
Traitouroc'h e blijadurio ;
Ken fresk, dous, koant int da welet,
Ken c'houero-heu p'int tanvaet.
6. 'Vit pinvidigez, Sant Jeg en a
Ur binvidigez ar gwella,
Furnez ha peuc'h en e ine,
Bennoz ha graso mad Doue.
7. Ab vije war ar seurt mado,
Gante eo a re ténorio,
Ar mado n'eont na gant laër,
Na prenv, na melg, nag an amzer,
8. Graet, Sant Patron, ma vemp 'veldoc'h,
Er furnez o lakat hon loc'h,
O klask kenta bennoz Doue,
Hag an treo-all 'n e goude.
9. Hon miret oll, bihan ha braz,
Er c'houlzo-ma poaniuz, siouaz !
Hon miret oll stard en hon fe,
Gwir servijerien hon Doue
10. Miret ar iaouank en furnez,
Disket d'ar c'hoz ar zantelez,
M'oc'h enoro gwir ho proïs,
Ho pugale vad Eviaziz.
11. Pa vo klanv hon bugaligo,
En ho chapel ni o gwestlo,
Ha c'houi o rento en iec'het
D'ar mammigo paour d'inec'het.
12. Hon diwallet korf hag ine,
Biniget hon foanio ive,
Ho pennoz war trao ha loenet
C'houi vo ganimp un tad karet.

L'abbé Biler, Recteur d'Inis.
B. AZENOR.